

# Hun ar Barz

166

Skuiz e gorf, skuiz e benn ar barz a zo kousket.  
Dispignet 'neus e nerz hag e holl wiziegez,  
Taolet 'neus d'ar Vreizis eur galv leun a furnez  
'Vit adsevel o bro gant an estren gwasket.

217

Kousket eo, roufennet e dal gant melkoni  
E zorn a zav evel da vallozi eun dra  
Mes eur pennad goude, gwak ha laosk, koueza 'ra  
Evel hini eun den prest da fallgaloni.

Daourt hag hen, kav ar barz eo re ziaez derc'hel  
Ar pez hen deus trouet gwechall d'e genvreudeur  
Daoust hag-hen 'wel evro peurwestlet d'ar gwalleur?

Nann ! rak souden n'e hunvre e tarz 'barz an dremwel  
Eur gir, ar gir « Esper », o lugerni dre-holl  
En lizerennou tan war Vreiz o vont da goll !

F GOURVIL.